

01 06 1967

~~~~~

G W E N E D O U R

~~~~~

BONEZLEVR HAG ARDAMEZEG BREIZH

troidigezh

gant

aBENNEZ

Lizherenn " A "

R A K K E M E N N

Amañ e vezo kavet testenn vrezhonek ardameziou ar Vonezidi a gaver o anv en Hanez hon Bro. Tennet int bet en hon yezh gant abEnnez o kemer da ziazez DGA, gant Yellen hag abEnnez (Gwenedour 18-19, 1965 ; oberenn paeroniet gant Akademiezh Vreizh)

N eus bet en hon mennoz met reiñ un droidigezh eus an ardameziou, evit aeseat o labour d'an hanezourion o deus da bleidiñ gant unvarregezh an ardamezouriezh

Diazezet eo ar skrid a gavfet amañ war 'Nobiliaire et Armorial de Bretagne' (Bonezlevr hag Ardamezeg Breizh) , gant Pol POTIER de COURCY (2^t mouladenn - Naoned-Paris, 1862)

Korvoet ez eus bet ivez ardamezegi arall, en o zouesk St Allais, La Chesnaye des Bois ha Briant de Laubrière pergen, hep na ve degaset bep tro an dave da hevelep oberoù.

Heuliet ez eus bet urzh ha roll F. Potier de Courcy, ouzh o c'hlokaat gant melladoù diouzh an ardamezegi a-us. Arabat d'al lennerion eta bout souezhet gant se.

Distroct ez eus bet e brezhoneg anvioù an tiegezhioù a vonez, kement ha ma'z eus gallet henn ober. E dibenn pep levrenn e vezo kavet ur roll a'n tiegezhioù-se gant o stumm skoueriektaet hag an hini marilhet, bep tro na vo ur c'herm bennak etreze ac'hoel.

Evit ar sturiadoù hag al luganoù, ez eus bet graet evel-mañ :

- 1) laosket eo bet pep sturiad ha lugan aralvezhek evel marilhet ; etre krommelloù ez eus degaset un distroadenn vrezhonek gant aE. Amañ n' emamp ken gant ur yezh spis evel hini an ardamezouriezh ; ha muioc'h a frankiz a c'hell, a gred dimp en devout an troour. Soutil e vez a-wezhioù ivez hevelep lavarioù da dreiñ ha doan a sav en troour rak o zreuzveizañ : 'traduttore, traditore', evel ma lavar egile.

- 2) meur a sturiad ha lugan zo - marilhet - e brezhoneg en Ardamezeg Vreizh, a-drugarez Doue. Skrivet int bet bep tro e brezhoneg-bremañ. Ar skridadoù-orin avat a vezo kavet ivez e dibenn pep levrenn

Pedet eo neb a oar diouzh an Ardamezouriezh ha diouzh Hanez Breizh kas dimp o alioù hag o abegadennoù zoken. A galon vat e vo graet dioute hag eilgeriet d'o lizheroù. Ne vo ket taolet an disterañ pled avat ouzh ar burutelladennoù a n e r ha didalvoud o tont a-berzh tud na ouzont ket diouzh a vurutellont

BONEZLEVR HAG ARDAMEZEG

B R E I Z H

testenn vrezhonek gant a b E n n e z

- AAGE (de 1.) : en aour e crez dispak en gul, gelvenet hag iziliet en glazur
- ABELI : en argant e ouezoc'h en sabel, skilfet en argant ivez ; e gab en glazur karget gant ur greskenn en argant hebiaet gant div steredenn en aour STURIAD A Domino factum est (Gant an Aotrou e voe graet)
- ABELIN : en glazur e sourin en argant karget gant ur parzh en gul ha leinet gant ur flourdilizenn en aour
- ABRAHAM : en argant e deir eilemn en sabel, eilet gant dek steredenn en gul, 4 3 2 hag 1 (siell 1381)
- ABIVEN : en argant e feunteun en gul
- ACHART : en argant e ziv dreustell en gul
- ACHON du Plessis : en aour hadet gant lies flourdilizenn en glazur
- ACHON de la Ragotière : en gul e zaou barzh en aour an eil dreist egile
- AGINIEG : en erminig e dreustell zivouedek en gul karget gant teir flourdilizenn en aour STURIAD Neque terrent monstra (Euzhviled no'm spontont ket) LUGAN Bretagne (Breizh)
- ADAM : en aour e dour kranellek en sabel, leinet gant un tourigan kevliv
- ADAM : brizhet en argant ha gul, e vevenn en sabel bezantet en argant
- ADHEMAR : en aour e deir sourin en glazur STURIAD : Plus d'honneur que d'onneurs (Enor nuiget enorioù) LUGAN : lancea sacra (Sparr sakr)
- ADVOKAD (an) : en glazur e sourin c'harzentek en argant, hebiaet gant teir zenegzenn en aour, 2 1
- AGARD : en gul e valvaen eizhbroudek en aour, e gab gwriet en glazur karget gant ur groaz avalaouek en aour
- AGAY : en aour e leon en gul, e gab en glazur

- AGES (des) : en argant e lammell en sabel, konkot gant peder rozenn en gul
- AIGUILLON : en sabel e deir fempdiliaouenn en argant (siell 1381)
- AILLOIRE : en glazur e flourdilizenn en aour ouzh kondon, konkot ouzh 1
ha 4 gant ur steredenn en aour ; ouzh 2 ha 3 gant ul loar gev-
liv
- AIRAULT : en aour e vleiz skrapant en glazur
- ALBERZH : en aour e leon krabanek, teodek ha kurunek en gul : argemm ;
perrannet en gul e ziv skodenn-lore en argant diouzh lammell,
e gab gwezboellet en argant ha glazur war deir rezenn.
- ALÈGRE : en gul e dour en argant, hebiaet gant c'hwec'h flourdilizenn en
aour diouzh peul. 3 3
- ALESMES : en gul e ziv dreustell gommek en aour, e gab kevлив
- ALAN : en glazur e gebrenn en argant, eilet ouzh beg gant ur vezantenn en
aour.
- ALAER : en glazur e gudon nijant en argant, konkot gant peder erezan en aour
- ALANO : en glazur e ziv sourin en argant
- ALANIG : en argant e yar en geoted eilet ouzh kab gant daou ui en limestra
- ALLEAUME : en glazur e gebrenn-faoutek en aour, eilet ouzh kab gant div roz-
enn gevлив, hag ouzh beg gant ur goulm ouzh kleiz en aour,
leinot gant ur steredenn gevлив
- ALAMAN (an) : en gul e gebrenn en aour, eilet gant teir rozenn en argant.
- ALAMAN : en glazur e dri lestr en aour, fardet en argant
- ALENO : en argant e deir joskenn-oueroe'h en sabel, diframmet en gul
STURIAD : mat eo kelenn e pep amzer
- ALENOU : en argant e gab gourdentek en gul.
- ALENOU : en argant e deir c'hebreenn en gul.
- ALEREG : en argant e eroc-veur en sabel
- ALLEZ : sourin karget gant teir c'hreskonn, konk kleiz karget gant ur ster-
edenn (siell 1418)
-
- ALAER : en gul e gebrenn en aour, eilet gant teir balafenn nijant en argant
- ALBERZH : en aour e vleiz skrapant en gul

ALIOU tri orsel (siell 1407)

ALLIANT : en glazur e sourin en aour, eilet gant teir steredenn gevliu ;
argemm : e gab en argant karget gant un dreustell granek en
glazur.

ALOIGNY (ar Roc'h-kreñv) : en gul e deir flourdilizenn en argant. STURIAD :
Lilia semper florent (Lili beprod a vloagn)

AMAT : en argant e dri fenn-morvran en sabel, diframmet ha gelvenet en gul

AMBOISE : en glazur e leon en aour, e gab peuliazouet en aour ha gul a EO
AMBOISE, ar c'hentañ peul diforc'het gant un delfin en aour.

AMELINE : sourinet en argant ha gul war eizh, e gab en glazur karget gant
un heol en aour

AMELOT (de Chaillou) : en glazur e deir c'halon en aour, ^{2.1} leinet gant un heol
kevliv. STURIAD : Est illis igneus ardor (Gwrez zo outo)

AMENART : toneget en argant ha glazur war c'hwec'h

AMPHERNET : en sabel e evez dispak en argant, gelvenet hag iziliet en aour.

AMPROUX : en geoted e deir daerenn en argant

AMYS (du Ponceau) : en argant e gebrenn-faoutek en gul, eilet gant teir del-
ienn (argemm : delienn-wini) en geoted. STURIAD : Uirtus et
fidelitas (Kalonied ha feleunded).

ANAST : en aour e groad koñchek en sabel, konket gant teir steredenn gevliu.

ANCENIS : en gul e deir fempdiliaouenn en erminig (siell 1276) STURIAD :
Folium eius non defluet (E zelioù ne weñvont ket).

ANCREMEL : en argant plezhet en gul war 6

ANDENIEG : en argant e dri ererig en gul, gelvenet hag iziliet en glazur
(siell 1392) STURIAD : Aquila non capit muscas (An erer ne
bak ket kelion).

ANDELOT : en sabel e evez dispak kurunek en argant

ANDRAULT : en glazur e deir steredenn en argant.

ANDREV : en argant e gebrenn en sabel, eilet gant teir melionenn gevliu
STURIAD : Sans venim (Distlemm)

- ANDREV : en gul e dreustell en aour, eilet ouzh kab gant div vouale'henn
 hag ouzh beg gant div steredenn, an holl en aour.
- ANDREV : en gul e lammell en aour
- ANDREV : en gul e c'hadgi en argant, gwakoliet en aour e kab en glazur
 karget gant un heol en aour
- ANDRIEUX : en aour e dreustell en geoted, karget gant teir ferenn en aour,
- ARGENNES : en sabel e lammell en argant
- ANGER : en brizh e sourinan (argemm : e deir c'hroskenn) en gul. Argemm
 en sabel e deir flourdilizenn en aour. STURIAD : Fides (Feiz)
- ANGES (des) : en glazur e gebrenn en argant eilet gant teir ferenn en aour.
- ANGLEBERMES : en gul e gebrenn en aour
- ANGOULVENT : en geoted e dreustell en erminig ; argemm e balefarzh karget
 gant teir sourin (siell 1379). STURIAD : Vorat (Sklouf eo).
- ANJORRANT : en glazur e deir lilienn en argant, bleuniet en aour ha deliet
 en geoted.
- ANJOU (kontelezh) : henard : en gul e skarbouklenn avalaouek ha bleuñvell-
 ek en aour, perrannet en aour, e erez dispak en sabel
nevez- : eus France, e vevenn en gul
- ANNEBAUD : en gul e groaz en brizh
- ANNEIX : en glazur e steredenn en argant, eilet gant teir c'hroazigan havek
 kevli
- ANODE : perrannet : ouzh 1 ha 4 en gul e flourdilizenn en argant : ouzh 2
 ha 3 en aour leun.
- ANSKER : en argant e bemp talbennan en gul diouzh lammell
- ANSKER : en glazur e arbenn-karv en aour
- ANTENAISE : en argant e erez-dispak, he divaskell ouzh beg, an holl en gul
 (siell 1225) ; argemm : perrannet brizhet en aour ha gul
- ANTENAISE (skourr) : en argant e deir eilenn en gul diouzh sourinoù.
- ANTEVILLE : en argant e deir dreustell en sabel, e lammell gevli (argemm
 en gul) balirant.
- AOUSTIN (eus Bro-Saoz) : en gul e lammell en argant, karget gant un dorzh-
 ell en glazur ouzh kondon

- ALOUSTIN : en glazur e gleze en argant diouzh peul, eilet gant teir stered-
 enn en aour, 1 ouzh kab ha 2 diouzh treustell, ha gant
 ur greskenn gevliu ouzh beg.
- APPELVOISIN : en gul e oged en aour ; argemm e balefarzh karget gant teir
 zenegezenn (siell 1345)
- APINIEG : en argant e ber en sabel.
- APREMONT : en argant e deir c'hreskenn en gul.
- EBREL : en argant e gebrenn en gul, karget gant teir rozenn en aour hag eil-
 et gant daou benn-leon en sabel ouzh kab, ha gant ur steredenn
 gevliu ouzh beg.
- ARAZON : en sabel e seizh kroazvaen en argant, evel ar VOTENN.
- ARAGON (eus Bro-Spagn) : en aour e bevar feul en gul.
- ARBALESTE (1') = ar Fustwareg : en aour e lammell en sabel, eilet gant peder
 fustwareg en gul.
- ARCEMBURY : en argant e groaz en gul karget gant peder zenegezenn en argant
 hag ur greskenn en aour ouzh kondon, ha konket gant peder
 flourdilizenn en sabel.
- ARDAINE : en argant hadet gant lies nerveskenn en glazur, e sourin karget
 gant lies delienn-golenn (siell 1382)
- AREL : perrannet en argant ha glazur. STURIAD : L'honneur y gist (Eno emañ
 an enor e c'hourvez...)
- ARGANTEG : en argant e sourin granek en gul, eilet diouzh gourem gant e hweñh
 moualc'henn gevliu (siell 1381)
- ARGANT : gwezboellet en argant ha gul.
- ARGENTON : en aour e deir zorzhell en gul, ar skoed hadet gant lies kroazig-
 an argazeliak en glazur
- ARC'HANTRAD : en argant e groaz pavek en glazur STURIAD : Porta coeli, cruz
 (Dor an noñv, ar Groaz).
- ARGOUGES : perrannet en argant ha gul (argemm : en aour ha glazur (argemm
 argant)) e deir fempdiliaouenn en gul balirant. STURIAD : A la
 fé, je crois (Er feiz e kredan).
- ARGY : en aour e bemp pempenn en glazur diouzh gwifrelloù

- ARIBART : en argant e deir óhreskenn en gul.
- ARMAILLE : en glazur e dri malvaen en aour.
- ARMENEG : en aour e dreustell en glazur, eilet gant teir moualc'henn gevli
- ARMYNOT : en argant e deir brizhenn en sabel. **STURIAD** : Armis notus (dre an armoù brudet).
- ARNAULT : en glazur e sourin en aour, karget gant tri zalbennan en gul ha hebiaet gant teir steredenn en argant ouzh kab.
- ARNOUS : en glazur e leon en aour
- AROT : en glazur e zenvarc'h en erminig, o tougen war e skoaz ur vatarazh kevli.
- ARQUISTADE : en argant e gebrenn en gul, eilet gant teir melionenn en goeted.
- ARS : en argant e deir fempdilizaouenn en gul.
- BRZEG : en sabel e erez-dispak en argant, gelvenet hag iziliet en gul.
- ARTAUD (Arnault pe Arcaud, esk. Roazhon 1349-1354) : en glazur e gebrenn en argant, eilet gant teir bezantenn en aour.
- ARPOIS : en sabel e ^{c'hrizilher} louanek en argant.
- ARZHUR : en glazur e greskenn en argant, eilet gant tri malvaen kevli.
- ARZHUR : en glazur e greskenn en aour, leinet gant div steredenn gevli.
- ARZHUR : en gul e denegezenn en aour, e gab en argant.
- ARVORIG : 1 - en glazur e seizh flourdilizenn en argant ;
2 - perrannet ouzh 1 ha 4 en glazur e c'hwec'h flourdilizenn en argant ; ouzh 2 ha 3 en aour e leon en glazur
- ARZHON : en aour e oged en sabel ; argenn : en glazur e deir steredenn en aour, eilet gant ur ganevedenn gevli ouzh kab ha gant ur greskenn en argant ouzh beg.
- AZEREG : En glazur e zek bezantenn en aour, 4 3 2 hag 1
- AZEREG : Barlennet en aour ha glazur war eizh. **STURIAD** : Franc à tout venant (Gwirion ouzh neb a dremen)
- ASSON : en glazur e dri leon en aour.
- AUBAUD : en argant e erez-dispak en sabel, **skilfet** en aour

- AUBEPINE (de l') = er Sperngwenn : perrannet ouzh 1 ha 4 adperrannet
ouzh 1 ha 4 en glazur e lammell divouedek en aour eilet
gant peder e hanoenn gevliiv ; ouzh 2 ha 3 en gul e deir
bleuñvenn-sporn-gwenn en argant ; ouzh 2 ha 3 adperrannet
en gul e groez eoriz en brizh.
- ALBERZH : en gul e dreustell en argant karget gant daou garv tremenant en
sabel (siell 1406)
- ALBERZH : en glazur e c'hargen (argenn : e c har) en argant karget gant
ur greskenn en gul.
- ALBERZH : peulicouet war c'hwec'h en argant ha gul, e dreustell en glazur
balirant
- ALBERZH : en gul e deir horzh en argant
- AUBIER : en argant e deir grilh en sable, o zroad inarek kevliv.
- ELVENIEG : en glazur e deir fellenn groaziek en aour (siell 1195) ; argenn
en gul e beder gwerzhidenn en aour diouzh treustell, eilet
gant c'hwec'h bezantenn gevliiv (siell 1200).
- ELVENIEG : en gul e leon en erminig, skilfet, teodot ha kurunet en aour
(suell 1380)
- ELVENIEG : en argant e dreustell en gul, karget gant teir bezantenn en aour.
- ALBIN : en glazur e dreustell en aour eilet gant teir c'hroaz pavek kevliv
- ALBIN : en argant e wezenn en gooted
- AUBRAIS (des) : en gul e deir c'hamell en aour
- AUBRÉE : en argant e barzh-leonek en gul, o tougen ur c'hleze kevliv, eilet
gant ur steredenn ivez en gul ouzh kab hag ouzh beg ; e vevenn
kenframmet en sable hag aour.
- AUBRY : en argant e deir flourdilizenn en glazur.
- AUBRY : en glazur e zaou sparr en argant diouzh lammell, eilet gant ur mal-
vaen en aour ouzh ha gant ur parzh kevliv ouzh beg.
- AUBRY : en glazur e zaou leon tal-ouzh-tal en aour, o skorañ ur skoedan en
argant karget gant ur wezenn-abrikez en gooted.
- AUDEBERT : en aour e deir rozenn en gul hag e steredenn gevliiv ouzh kondon ;
e gab en glazur karget gant div flourdilizenn en aour, dre
aotre Herri 3, roue Bro-C'hall.

- AUDIBERT : en glazur e leon en aour, eilet gant div greskenn en argant.
- AODIG : en aour e dreustell c'horreet en ginerminig, eilet gant teir ster-
edenn en glazur ouzh kab ha gant teir sourinan eilhonek ha
divouedek en geoted ouzh beg
- AUDOUYN : en glazur e vrec'h-ouzh-dehou en argant o tougen ur grizilher kev-
liv, eilet gant daou valvaen en aour ouzh kab
- AODREN (Aotrou Kerdrel) : en gul e dri zour toek en aour, mogeriet en sabel
STURIAD : Tour à tour (Tro-ouzh-tro c'hoari-ger gant 'tour')
- AODREN : en argant e gilhog en sabel
- AODREN : en glazur e dri fenn-gadgi en argant
- AODREN : en aour e dreustell granellek en glazur
- AUFFRAY : Treustellet (argemm sourinet) en argant ha sabel war c'hwec'h e
leon en aour balirant
- AOFRED : en glazur e gebrenn en aour, eilet gant teir c'hatellrodenn gevliu.
- AUFFROY : talbennanet en argant ha sabel (siell 1241) ; argemm e dreustell
en gul karget gant ur rilhem en argant
- AUGEART : en glazur e dri garz ent-wirion
- AULNETTE : en glazur e deir c'hreskenn en argant.
- AULNIÈRES : en glazur kanochet en argant.
- AUMER : en gul e deir sourin en argant, ar gentañ karget gant ul leon en
sabel
- AUMOSNES (de l') : en argant e ziv dreustell en gul leinet gant daou houad-
an en sabel (siell 1400)
- AUMONT : en argant e gebrenn en gul, eilet gant seizh moualc'henn gevliu, 4 3
- ALRAE (kêr e Bro-Ereg) : en gul e gaerell dremenant en argant, kabellek en
erminig, e gab en glazur karget gant teir flourdilizenn en aour.
- ALRAE : perrannet (argemm : talbennanet) en aour ha glazur
- AUSSONVILLIERS : en glazur e lammell en aour konket gant teir steredenn gevliu
- AUSPRAC : en glazur e deir c'hreskenn en argant
- AUPIER : en glazur e gab gourdentek en aour, karget gant ul leon-parzhok en
sabel. STURIAD / Nec dura nec aspera terrent (Rak kalet ha rak
garv ne spontont).

- AOTRED : en aour e bemp pempenn gommek en glazur. STURIAD : Dre ar mor.
- AUVERGNE : en sabel e groaz en argant, konket gant pevar fenn-bleiz diframmek kevliv
- AUX : troc'het : ouzh 1 en glazur e dri c'horrgi en argant ; ouzh 2 en argant e leon en gul ; argemm : en aour e deir eroz en sabel
- AVALEG : en glazur e dreustell en erminig ; argemm : en aour e dri fenn-bleiz en sabel.
- AVALOD : en glazur e ziv gontellazh (argemm : e zaou gromngleze) en argant diouzh lammell, krogennet en aour
- AVALGOUR : henard : ur wezenn karget gant tri aval (siell 1198).
novez- : en argant e gab en gul (siell 1229) ; argemm : diforc'h-et gant ur malvaen en aour, evit skourr KERGROAZ. STURIAD : Utimur (ganti e roomp)
- AVAUX : en aour e greskenn en sabel.
- AVENELL : en gul e dri ererig en argant
- AVENELL : en sabel e garv tremenant en aour
- AVERTON : goudreustellet en argant ha gul
- AVICE : en glazur e nav aval-pin en aour
- AVIGNON : en gul e lammell en argant, cilet ouzh kab gant ur vezantenn, ouzh lezioù hag ouzh kab gant teir zenegezenn gevliv.
- AVOINE : en gul e barzh en argant
- AVOIR : en gul e groaz eoriek en aour (siell 1378)
- AVRANGE : en glazur e gobrenn-faoutek en aour, cilet gant teir bezantenn gevliv, e dostal gwriet en gul, karget gant arouez 'Marc'h eg an Impalaeriezh' (nunc Légion d'Honneur, briarouez e'hall).
- EBREL : en argant e binonn en gooted, e gab en glazur karget gant teir rozonn (argemm : storodonn) en aour.
- EBREL : en argant e zorvenn en gooted, meziet en aour, hebiaet gant div goulm tal-ouzh-tal en gul, e tougen bep a vodig en gooted
-
- AOTRED (stagadenn) : argemm : en argant e beder goudreustell gommek en glazur ; argemm : en aour e beder zreustell gommek en glazur

AYMERET en argant e gebrenn en sabel, karget gant toir zouggezenn en aour

AVRAULT en glazur e ziv gebrenn en aour

ANTIGNY en aour e leon kudennek en sabel.

AYMER en argant e dreustell genfrannet war bevar en sabel hag en gul.

ROLL AN TIEGEZHIOÙ E SIGUR O SKOUERIEKADUR

	St skouer	St marilhek		St skouer	St marilhek
1 1	ABELI ABIVEN AGINIEG ADVOKAD	ABELY ABYVEN ACIGNÉ ADVOCAT	1 5	ARGANT ARC HANTRAD	ARGENT ARGENTRÉ
1 2	ALBERZH 2 ALAN ALAER 2 ALANO ALANIG ALAMAN 2 ALENO ALENOU 2 ALEREG ALLEZ	ALBERT ALLAIN ALLAIRE ALLANEAU ALLANIC ALLEMAND ALLENO ALLENOU ALLERAC ALLÈS	1 6	ARMENEG ERZEG ARZHUR 3 ARVORIG ARZHON AZEREG	ARMENEC ARSAC/ERZAC ARTUR ARVORIC ARZON ASSERAC
1 3	ALIOU ANDENIEG ANDREV	ALLIOU ANDIGNE ANDRÉ	1 7	ALBERZH 4 ELVENIEG 2 ELVENIEG ALBIN 2	AUBERT AUBIGNE AUBIGNY AUBIN
1 4	ANDREV ANSKER	ANDRÉ ANSQUER	1 8	AODIG AODREN 4 AOFRED ALRAE 2	AUDIC AUDREN AUFFRET AURAY
1 5	APINIEG EBREL ARAZON ARGANTEG	APPIGNÉ APURIL/AVRIL ARADON ARGENTAYE	1 9	AOTRED AVALEG AVALGOUR AVENELL 2 EBREL EBREL	AUTRET AVALEUC AVALGOUR AVENEL AVRIL/AURIL APURIL

SKRIDADOÙ-ORIN

ar sturiadoù brezhonek

ALENO : Mad é quelen é peb amzer.

AOTRED : Dré ar mor.

DA STAGANŃ OUZH DGA

(o c'h ortoz ken na vo embannet ur stagadenn glokoc'h)

PERRANNET = palefarzhet

SKILFEK = krabanek

FARDET = grect (lestr)

GELVENEK = pigosok

EREZ DISPAK = erez daoubennek

e-lec'h LEONPARZH- lakaat PARZH- (Sn pard)

WAR AR STERN

GERIAOUEG AN ARDAMEZOURIEZH (e brezhoneg hepken)

DORNLEVR AN ARDAMEZOUR

Geriaoueg Saozneg-Brezhoneg ha Brezhoneg-Saozneg
an Ardamezouriezh

BONEZLEVR hag ARDAMEZIEG BREIZH (heuliad)

Priz al levrenn-mañ : 2,50 F

Gwenedour : *trimestriel* c.p.p. 41 411 Abé-lin . 5 FF
Depot legal effectué - Direct.-P. Imp. H. Hillion 56 ARZON
c.p. Rennes 120 68